



Kinnig-labour / Stummer.ez - Sant-Ervlan (44)

Post-labour : Stummer.ez war ar brezhoneg

Emglev a-stroll ar stummañ : pazenn 10 (12,75 € kriz / eurvezh)

Amzer-labour : darn-amzer (21 eurvezh / sizhun)

Kevrat : CDD 6 miz

Lec'h labour : post diazezet e Skol an Emsav - Sant-Ervlan (12 bali / avenue de l'Angevinière, 44800)

Deiziad kregiñ : d'al Lun 28 a viz Eost 2023

Kefridioù :

- Kelenn brezhoneg da stajidi ar stummadurioù micherel (6 miz, 3 miz)
- Prientiñ kentelioù, asambles ha gant sikour ar skipailh stummerien

Aozioù labour :

- Kentelioù e-pad an deiz
- Kentelioù e Sant-Ervlan
- Prantadoù-labour e Roazhon a-wezhiadoù (emvodoù, stummadurioù, stajoù...)

Barregezhioù goulennet :

- Live brezhoneg uhel dre-gomz ha dre-skrid : C1 – live 5 an DBY pe Aotreegezh war ar brezhoneg
- Diplom / Skiant-prenet war ar c'helenn hag ar bedagogiezh
- Anavezout bed ha mont-en-dro ar stummañ evit an dud deuet
- Anavezout an hentennoù da gelenn brezhoneg ha da luskañ ur gentel hiziv-an-deiz
- Bezañ gouest da verañ e amzer-labour (kelenn er c'hlas, enklask/prientiñ kentelioù, kefridioù all a denn da vont-en-dro ar greizenn stummañ)
- Aotre-bleniañ B

Doare den :

- En e vleud gant ur strollad tud deuet
- Entanet gant ar c'helenn da dud a bep seurt buhezioù, raktresoù ha hentoù-micher dezhe
- Plijet o kenlabourat gant e geneiled evit prientiñ ha kas ar c'hentelioù
- Dedennet gant teknikoù pedagogel liesseurt (o deskiñ, o rannañ gant ar geneiled)
- Gouest da labourat en ur mod emren koulz hag a-stroll
- Entanet o teskiñ hag o rannañ e ouiziegezh dalc'hmat
- Spered krouiñ ha nerzh kinnig

Ur stummadur a vo kinniget e diabarzh ar greizenn, gant kenurzhierzed ar bedagogiezh hag an hentad stummañ e Roazhon. Ouzhpenn-se e vo harpet hag ambrouget ar stummer nevez gant ar skipailh.

*Lizher emginnig + CV da gas da emmanuelle.siohan@skolanemsav.bzh a-benn al Lun
16 a viz Even 2023.*